

164

Invocation en interest an dud maleiurus
Revinet oll gant an doureyer bras, er bloa 1846.

(118, suite)

Doze a visericord ! demeus a lein an êe
Sellit gant compassion demeus ho fugale,
Reduet d'an oll vizer, en disesper, sivoas !
Dre 'r maleuriou êmet dre an doureyer bras.

Oh ! pebes niver a dud a veler a bep-tu,
Hep boued, collet gante oll, hac hep nep seurt repu !
Grit antren an esperanz ebars o c'halonou,
Ha scuillit ho madelez varneze, va kuitrou !

(119)

Pedi a reomp ive ho Mab divin Jesus
Da rente 'n oll gristenien muioc'h-mui generus
En andret ar victimou fulor an doureyer,
To rentet hirio an deiz en horrupla mizer.

O Mari ! Gwerc'hez santel, Protectourez ar Franz,
Lagit hoc'h oll bugale da zigast o offranz
Da zoulaji o breudeur, rentet qer maleiurus
Dre ravach an doureyer horrupl ha spourous.

Mes ni dreist oll, Bretonet, atao gwir gristenien,
En em hastomp d'o zicour en o c'her bras angen :
Doze a lavar deomp oll soulaji hor breudeur
P'en em gavont reduet d'ar glac'har, d'ar maleur.

A. Lédan.

Arroc ar voerzic-mañ e zeus eur recit eus an inondationou euzus eus ar ri-
vierou bras al Loir, ar Rhon, ar Mên, an Adour, ar Var ha re all.

An dra-ze a voerzen, hac e roen an anter eus ar pris en faveur victimou an
doureyer bras.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 118-119.)
strophes nay numérotées.